

SILVESTRIG  
Silvestrig

E-kichen chapel Sant-Laorañs war-lein montenn Menez-Bre  
A zo tudjentil yaouank o sevel un arme

Me 'm eus ur mab Silvestrig ha 'm eus ket mab nemetañ  
Ha ma ya da bartial, glac'haret on gantañ

War-lein montenn Landreger, tostik da doull ma dor  
A zo un evnig bihan o kanañ, me a gred emañ en gor

Arsa eta evnig bihan, evnig an divaskell  
Na c'hwi a nijeh evidon da vordig ar brezel ?

Pa voe skrivet al lizher, skrivet ha kachedet  
A voe lakaet d'an evnig en treuz-kaer e-barzh e veg

Pa voe erru an evnig e-barzh ar gêr a Sedan  
Hag a voe Silvestr ar Moel en ur c'hombat ar c'haerañ

Sesit-c'hwi Silvestr ar Moel, sesit-c'hwi ho kombat  
Setu amañ ul lizher gant ho mamm hag ho tad

Diskennit-c'hwi evnig bihan, diskennit-c'hwi war droad  
E skrivin deoc'h ul lizher da gas d'ar gêr d'am zad

Na pa voe an evnig bihan oc'h anofis ar c'heloù  
Hag a voe Silvestr ar Moel e toull an nor o selaou

Sesit-c'hwi tad glac'haret, sesit-c'hwi ho taerou  
Erru eo ho mab Silvestrig c'hoazh da welet e vro

*Près de la chapelle Saint-Laurent au sommet du Menez-Bré  
Il y a de jeunes gentilshommes qui lèvent une armée*

*J'ai un fils Silvestrig et je n'ai que lui comme fils  
S'il s'en va j'en aurai du chagrin*

*Au sommet du mont de Tréguier, tout près de ma porte  
Il y a un petit oiseau qui chante, je crois qu'il couve*

*Hé bien donc petit oiseau, oiseau aux deux ailes  
Est-ce que vous voleriez pour moi au front de la guerre ?*

*Quand la lettre fut écrite, écrite et cachetée  
Elle fut bien mise au travers du bec de l'oiseau*

*Quand l'oiseau fut arrivé dans la ville de Sedan  
Silvestre Le Moel était dans un combat des plus grands*

*Cessez Silvestre Le Moel, cessez votre combat  
Voici une lettre de votre mère et votre père*

*Descendez petit oiseau, descendez sur vos pieds  
Je vous écrirai une lettre à envoyer à la maison à mon père*

*Quand le petit oiseau était en train d'annoncer la nouvelle  
Silvestre Le Moel était sur le seuil à écouter*

*Cessez père chagriné, cessez vos larmes  
Votre fils Silvestre est arrivé pour revoir son pays*